

Tud ar vro - Bro Leon
Roll kanaouennoù - Dañs round

Digdontonton

Digdontonton p'oa digoret ar paper,
Don ma dondon me 'm boa pevar amour,
Don ma dondon me 'm boa pevar amour.

Digdontonton va zad a c'houlenn diouzhin,
Don ma dondon p'hini a garen ar muiañ,
Don ma dondon p'hini a garen ar muiañ.

Digdontonton dezhañ am eus respontet,
Don ma dondon va bonne-amie Louise,
Don ma dondon va bonne-amie Louise.

Digdontonton na kit 'ta d'ar bal bremañ,
Don ma dondon ho taou asamblez,
Don ma dondon ho taou asamblez.

Digdontonton kit 'ta da zañsal bremañ,
Don ma dondon da Bardon Sant Mikeal,
Don ma dondon da Bardon Sant Mikeal .

[Mikael]

Digdontonton adieu tadoù ha mammoù,
Don ma dondon breudeur ha c'hoarezed,
Don ma dondon breudeur ha c'hoarezed.

Digdontonton me ya da zalc'h ur menaj,
Don ma dondon gant va muiañ karet,
Don ma dondon gant va muiañ karet.

Digdontonton n'eo ket evit ur bloavezh,
Don ma dondon na 'vit bloavezh hanter,
Don ma dondon na 'vit bloavezh hanter

Digdontonton me 'ya evit da jamez,
Don ma dondon ar rest diouzh va buhez,
Don ma dondon ar rest diouzh va buhez.